



Tro ha  
Distro



## Programm ar rummad àr an troiñ

*Ne dalv ket ar skrid-mañ e « gwenedeg » e vo gwraet get ar rannyezh-se e-pad ar sizhun, nag e vo digomprenabl ar stummerion !*

### 1. Paliou ar rummad

En un endro divyezhek, mand eo kreñvoc'h ur yezh evit egile, ni 'bez afer dalbezha a droiñ ag ar yezh kreñvañ, ha pa vehe termenoù o-unan lies-mat, ma faot deomp implijiñ ar brezhoneg àr ar pemdez. Paliou ar rummad zo neuze :

- Gober anaoudegezh get an dermenografiezh hag an troiñ dre vras : talvoudegezh, feson d'ober ha c'hoazh.
- Pleustriñ àr an dermenografiezh hag an troiñ, get div destenn disheñvel, a-stroll hag e-unan (pe a-zaou).
- Gwellaat e ampartiz da droiñ ha da skriviñ e brezhoneg get an evezhiadennoù a vo gwraet àr e labour adlennet.

### 2. Piv ?

**Stummour** : David ar Rouz, get sikour kelennerion arall àr ar lec'h evit adlenn an troidigezhioù.

**Digor da** : razh ar vrezhonegerion adal ar live B2.

### 3. Feson da labourat ha talvoudegezh

Ar ble-mañ e vo kanniget labourat e div feson. A bep eil e labourimp razh asambli àr un destenn c'hallek àr ar jardriniñ hag e labouro ar stajidi àr o zestenn goude, dezhe da lakaat e pleustr ar pezh a vo bet desket e-raok ha da ranniñ o c'havadennoù pe o diaezamantoù get ar re arall. Pleustret e vo èl-se àr ar labour **termenografiezh**, a vez afer anezhoñ evit **troiñ**, hag evit komz ha skriviñ a-ziàr a bep sort danvez er vuhez pemdez ivez.

E penn kentañ ar sizhun e vo em soñjet a-stroll àr an troiñ hag e vo kanniget ur feson d'ober ha benvegoù d'aoziñ ar labour-se. Goude e vo gouestlet un abadenn pe ziv da zisplegadennoù berr ha d'ur labour a-stroll àr un destenn a bled get ar jardriniñ, e-raok kendivizoù àr zisoc'hoù ar strolladigoù. En abadenn da heul e vo lakaet e pleustr ar feson-se da labourat get ar stajidi o-unan (pe a-zaou, lakaomp) àr an destenn dibabet gete.

En devezhioù diwezhañ e c'hello bout gouestlet muioc'h a amzer da labourat àr an destenn degaset get ar stajidi hag e vo adlennet d'ar bihanañ ur lodenn a bep troidigezh.

### 4. Degasit geneoc'h...

**Un destenn** « bragmatik », da lâret eo na vehe ket lennegezh, dre vras, deoc'h da labourat àrni ha da droiñ a-hed ar sizhun. Gelllet a ray bout un destenn hir pe hiroc'h mes ne vo ket posupl deoc'h neuze troiñ pep tra na, bihanoc'h c'hoazh, d'ar stummerion adlenn ho troidigezh a-bezh.

Un **urzhiaer** hezoug ma 'peus unan, get ur skridtreter (hag un taolennet).

**Geriadurioù** :

- geriadur an Here m'ema geneoc'h : talvoudus-bras eo ;

- ur geriadur divyezhek hollek àr baper a c'hello bout talvoudus ivez, na bout e kaver geriadurioù a sort-se enlinenn ;
- geriadurioù divyezhek hollek rannyezhel ma faot deoc'h chom stag doc'h ur rannyezh bennak ;
- geriadurioù arbennik àr an danvez, mar kavet anezhe.

Ur listennad geriadurioù a gavehet er bajenn « Geriadurouriezh ar brezhoneg » e Wikipedia : [https://br.wikipedia.org/wiki/Geriadurouriezh\\_ar\\_brezhoneg](https://br.wikipedia.org/wiki/Geriadurouriezh_ar_brezhoneg) hag e Tro ha Distro : [http://www.trohadistro.com/brezhoneg/teskadou\\_yezh.html](http://www.trohadistro.com/brezhoneg/teskadou_yezh.html).

Ur **yezhadur** a vez talvoudus ivez lies.

ANV : .....

Lennet em eus programm ar c'hentelioù **TREIÑ TESTENNOÙ TEKNIKEL** ha kadarnaat a ran va dibab da heuliañ ar rummad kentelioù-se bemdez, eus 9 eur da 12 eur diouzh ar mintin hag eus 2 eur da 5 eur goude kreisteiz, a-hed ar sizhun.